

Guers Lesobré.

Entre Coat ar Skine a Lesobre
e so assinet eun arme
Divoar ben eun allec wen
na ne voa da ini deus ane.

An otro Coat ar Skine a leveure
Dan otro Lesobre eun de a voe
Bed a meus eurs digant ar Roue
Da dont do Lazan Lesobre

Mar teus te bed urs(1) dam lazan
Discoel an aman din breman ?
— Disteran linen(2) zo em godel
ne rofen quet deun azen da Len.

mar gon me azen a dra sur
ne non quet azen dre natur
ma na teus quet annaveet ma zad
me ray dit annavesout e vap.

An otro Lesobre a leveure
De vom er guer pa arrie
Dibret dime ma ancane
ma hefomp dar gombat fete

— Bonchour dit otro Lesobre
Te zo deud da hunan dan arme ?
— Ma fachet bihan a so ye
ac a yelo er combat (3) couls a me.

*Sur le folio 40, seulement le titre (écrit à l'encre rouge) : Lezobré.
écriture Penguern.*

(1) L'u de urs, écrit en surcharge sur eu (d'abord : eurs) : urs.

(2) le 1er n de linen, écrit en surcharge sur gn (d'abord : lignen) : linen.

(3) le c de combat, écrit en surcharge sur un g.